

- 123 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

46. COMPLAINTE SUR LA MORT VIOLENTE DU P. GUILLAUME LECOURT, GARDIEN DES CORDELIERS DU MONASTERE DE N.D. DE GRACES PRES GUINGAMP.

Kichen goengamp, en couent Graç
a zo bet gret eur malheur braz

ar gardien zo bet lahet
gant daou vanac'h milliguet,
'r per Louis, ar per Frances
a heurtas 'n or assambles.

mez ann or a oa prennet mad.
- piou a zo aze, 'me an Tad.
- digoret, 'me ann daou vanac'h
- henoan na digerin ket dac'h.

Ann daou vanac'h a lavare
da c'hardien Gras a neuze :
- Gardien Gras, digor dimp ni,
ema'r laer er sacristery.

Allum e ar golo er lamp
digor armel ar zacramant.
Gardien Gras, vel ma clevaz
da bedi Doue n'em lekaz.

'n e goaze, 'n e oele zavet
d'bidi Doue en em laket :
- Itron Vari, assistanç din,
mi'm euz ornet arvat ho ty.

daieu gali aou(r) zo 'n ho ty
pa arruis na oa hiny.
eur c'hustod hag eur groaz arc'hant
d'ho seiz aoter accoutramant.

a neuze da digori e et :
ker goas digor n'han devoa gret,
quer goas digor n han devoa gret
e vue zo dea coustet.

ha pa oe marv gardien graç
cetu ar c'hleyer o son glas !

- 124 -

ar per Louis a lavare
d'ar per Frances ac a neuze :

- Kemer alc'houeou ann ilis
ha ques fonuz da groec'h ar vinq.
ha mar a zo nicun o son
plant eunn dag enn creiz e galon.

ar per Frances a lavare
enn traon ar vinq pa disquenne :
- mi assur d'hac'h dre ma fe vat
n'an deuz nicun o vranseillat.

nan deuz nicun o vranseillat
met graç ar oerc'hez hag e map.
da Vountroulez hi a zo et
peb habit neve o deuz bet.

Peb habit ru passamantet
oz menec'h na dereont ket
ann daou vanac'h a c'houlenne
ouz ar passajer a neuze :

- tremenet an omp ar bord al
car nimp ni na nomp quet tud fal.
- Tud honest oc'h; m'ho tremeno.
tostet d'ar vag ha mi oelo.

ha dal ma tostajont d'ar vag
e hes ann dour en liou ar goad.
- petore torfet o heus gret
dour ar mor n'ho andurfe quet.

- Gardien Graç a zo lahet
ac a zo dimp ni tamallet.
war al lec'h a hint bet staguet
hac hep dale hint bet crouquet.

Autro Doue pardon dimp-ni
d'ar martyr, de vuntrerien gri !

vvvvv